

2

DISPLEGADENN (Récitation)**ALANIG AL LOUARN**

An heol melen Dreg ar mene A strink, laouen, Trezek an Ne.	'Vel eul lapous, 'Vel an diaouled, Al loenig rouz A red, a red !
Kleo, chasee ! Ar c'horn sklintin Penn-da-benn kêr A son lirzin...	Bec'h d'Alanig, Tan d'ar peilhaer ! Bec'h d'Alanig Tan d'ar muntreer !
Ar c'hlizenn drant He deuz skuilhet Boulou arc'hant War an havreg.	'Dreuz ar girzier, 'Dreuz al lannou, Alanig laer A glask troiou...
Sao, goustadig, Eus da wele ; Lez gant Mammig Ar vugale !	E jilpadenn Stank ha raouliet, 'Hed an draonienn A gorn bepred...
Prim war da skoa Da fuzuilh vat. War-raok breman War-du ar c'hoad !	Dao ! Dao ! daou denn ! O reuz garo ! War an dachenn E ruilh maro !
Fri-Du, Lost-Gwenn ! Gwaskomp, paotred ! Alan beg lemm A dec'h d'ar red !	Ar chas, kerkent, Peurgounnaret, A-daoliou dent 'Deus hen brevet !

Hervez Pr. PROUX.